



Boneur ar Scolach,

**BONEUR**

DISTRIBUTION AR PRISON,

**AR SCOLACH.**

Ar 18 a 19 Eoz 1855

Var se ton galles  chantons, aimons, etc.

*[Faint, mostly illegible text, likely bleed-through from the reverse side of the page.]*

BONNEUR

AR SCOTLAND



# Boneur ar Scolach,

COMPOSET EVIT

## DISTRIBUTION AR PRISOU,

### E SCOLACH CASTEL,

Ar 16 a vis Eost 1859.

Var an ton gallec : *Rions, chantons, aimons, etc.*

O deiz a laouenidiguez,  
Nac a joa a santàn em e'halon,  
O velet teneridiguez  
Qement a dud eus a bep canton  
Diredet da veza testou  
D'eur ceremoni nobl ha touchant,

( 4 )

A ra tridal hor c'halonou  
En eur fêçon meurbet ravissant.

} bis.

Tadou, mamou carantezus,  
C'houi pere c'heus bet an avantach  
Da glasq rei sqüer eus ar vertus  
D'ho pugale amâ er Scolach;  
Sellit-o gant rejouissanç,  
Ar joa a luguern e peb-hini,  
O receo hirio'r recompanç  
Deus o furnes ha deus o studi.

} bis.

Dleout a reomp anaoudeguez  
D'ar mestrou demeus ar Scolach-mâ,  
Pere, leun eus a vadelez,  
Ho ramplaç avantajus amâ.  
O goalc'h a reont oll meurbet  
D'hon renta christeniën deread,  
O tont da orni hor speret  
Demeus a bep seurt principou mad.

} bis.

Un anaoudeguez spicial  
Hon doug da bresanti hon hommach  
Hirio d'an Autrou Principal,  
Pehini a enor ar Scolach :  
Graç dezàn da veza bepret,  
D'ar re a vo dindan e bouvoar,  
Leun a garantez ha yec'het  
Epad e vuez var an douar. } *bis.*

Ar vrô antier a dle hommach  
Da vemor ar Pastor venerabl  
A voezas founti hor Scolach  
Gant ur soign vras ha meurbet meulabl!  
Enor eta da virviqen  
D'an Autrou LA MARCH, Escop Leon !...  
En Breiz e tle peb güir gristen } *bis.*  
Conserv e vemor en e galon.

Ra deuyo ivez en deiz-mâ  
An Autrou Prelat eus a Guemper.

( 6 )

Da zantout en e galon joa  
O c'houzout hon eus grêt hon dever.  
Ar memes joa vo evidomp,  
Mar hor c'hav dign demeus anezàn,  
Rac contant meurbet e vezomp  
Mar bemp eürus da blijout dezàn. } bis.

—  
Deposomp oll peb a fleuren  
Var bez tri den an enorapla, (1)

Pere voezas goechal telen  
Ar vertus ebars ar Scolach-mâ,  
Ha requetomp digant Doue  
Peb seurt bonneur d'hor mestrou hirio:  
Assuret int, hed hor bue,  
N'ancounac'haimp biqen anezo. } bis.

An natur a zoug ac'hanomp  
Da garout autoret hor bue,  
Hac an anaoudeguez ro deomp

---

(1) An Autronet Péron, Liscoat hac ar Gall.

( 7 )

Carantez vit hor mestrou ive.  
Rac se ta, scolaerien yaouanc,  
Conservomp atao en hor memor  
Sonch er re o deus, hep nep manc,  
Disqet deomp an hent eus an enor. } *bis.*

Nep n'o deus qet bet ar boneur  
Da gavet ur pris en deiz caër-mâ,  
A deuyo, hep dale nemeur,  
Adare da guemer renq amâ;  
Neuze, carguet eus a gourach,  
E studiint gant calz a ardor,  
Vit beza dign eus o Scolach  
Ha da ober d'o c'herent enor. } *bis.*

O tont da güittât ar Scol-mâ,  
Darn da nebeut, darn all da vigen,  
Promettomp a galon amâ  
D'en em garout vel güir gristenien.  
E peb oad, e peb lec'h e zimp,

Qen a dost evel demeus a bell,  
A fonç hor c'halon e criimp:  
Enor ha gloar da Scolach Castel!... } *bis.*



*Gant tad ur Scolaër ancien  
demeus a Scolach Castel.*

